

Kenemglev buhez er skolaj

- Diazezet eo kempouez ar vuhez e-barzh ar skolaj war ar genfiziañs e atebegzh pep hini hag en doujañs ouzh ar re all. Ret d'an holl heuliañ ar reolennoeg-se.
- Strivañ a ra izili ar skipailh pedagogel, ar skolajidi hag o zud da zerc'hel ar spered-se en o darempredoù.
- Padal, eo ret lakaat un nebeud reolennoù pleustrek dre skrid war baper evit kelaouiñ ha kretaat surentez an holl.

Eurioù ar skolaj

- Lun, Meurzh, Yaou ha Gwener (8e25-5e). Atebek eo ar skolaj e-pad an eurvezhioù-se.
- Digor e vez dorioù ar skolaj adalek 8e00 mintin.
- Ret eo d'ar skolajidi bezañ gant o c'hentelioù. Pep diskarg-sport ouzhpenn eizhtez a zo da vezañ savet gant ur mezeg ha kaset d'ar burev buhez skol. Evit un diskarg dindan eizhtez e rank ar gerent skrivañ ul lizher da gas d'ar burev buhez skol ha d'ar c'helenner DKS.
- Pa vez ezvezant ur c'helenner ez a ar skolajidi d'o salioù-klas, nemet e vefe kinniget traoù all dezho gant ar skipailh pedagogiezh.
- Evit o surentez, hag evit kelaouiñ an holl, ne c'hell ket ar skolajidi mont er-maez eus ar skolaj etre daou brantad, nemet evit un ober gant ar skipailh pedagogiezh.
- Koulskoude, ma vefe ezvezant ur c'helenner e fin an devezh ha ma ne vefe ket erlerc'hiet e c'hell ar skolajidi (hervez o live klas hag hervez ma'z int diabarzhidi pe get) mont kuit eus ar skolaj gant aotre o zud (tro-kein ar c'haier-kenskrivañ da vezañ diskouezet d'ur c'hasour/gasourez).
- Kemennet e rank bezañ kement mare ezvezañs d'ar burev buhez skol a-raok 9 eur pe dre bellgomz (02 98 95 71 57) pe dre bostel (penngasouriezh.skolaj.jakez.riou@diwan.bzh). War-lerc'h, e rank bezañ reizhabeget gant un destenn deiziet ha sinet gant tud an hini ezvezant, ha kaset d'ar burev buhez skol.
- Pa vez klañv ur skolajiad e-pad meur a zevezh e rank reizhabegiñ e ezvezañs gant un destenn-mezeg pe un displegadur digant e dud kaset d'ar burev buhez skol.
- Ma vez klañv ur skolajiad e-kerzh ur prantad e ya gant dileuriad ar c'hlasad betek ar c'hlañvdi. Galvet e vo tud ar skolajiad ma n'ez a ket gwelloc'h goude ur mare diskuizh kerkent evit ma teufe ar familh da gerc'hat anezhañ.
- Tri devezh en a-raok da nebeutañ e rank ar goulennou ezvezañs, deiziet ha sinet, bezañ graet gant tud ar skolajidi.
- War-lerc'h ur mare ezvezañs e rank ur skolajiad kelaouiñ ar penngasourezed hag adaptout e zale en danvezioù-skol.
- Ma tegouezh ur skolajiad gant dale e rank diskouez d'ar c'helenner e gair kenskrivañ sinet gant ur c'hasour evit abegiñ e zale.

Raktres Diwan

- Mont e galleg er skolaj a ya a-enep raktres soubidigezh Diwan, goulennet vez digant ar skolajidi daremprediñ e brezhoneg, e pep lec'h ha da gentañ er salioù klas.

Mont en-dro ar c'hentelioù

- E penn-kentañ ar mintinvezh hag an abardaez ha goude an ehanou e rank ar skolajidi gortoz renket dindan ar bratell dirak al lec'hioù gortoz a zo merket ha pignat sioul gant ar c'helenner betek ar sal-glas.
- E kenkaz ma c'hoarvezfe 5 diouer a labour e vefe lakaet un dalc'h kastiz un eurvezh « ober e labour ».

- Kastizet 'vo ar skolajidi a glaskfe truchañ e-kerzh ur briziadenn pe ar re a rentfe o labour gant dale.
- Rankout a ra ar skolajidi doujañ ouzh an dud gour a zo en ti : chom seven bepred.
- Evit goulenn ar gaoz e rank ar skolajidi sevel an dorn, evit goulenn sevel er sal-glas, heñvel.
- N'eo ket aotreet ar skolajidi da cheñch plas er c'hlas hep goulenn an aotre.
- Ne skriver, na ne dreser, war an taolioù. Gwalc'hiñ an taolioù ma vezont lous 'zo ret.
- Er stalenn-dindan-taol emañ an dafar hollek. An dafar bras a zo er c'hombodoù. Levr na renkell ebet war al leur. Stalenoù ha kombodoù en urzh.
- Goulennet 'vez digant ar skolajidi chom hep louzañ ar salioù-klas (paper war al leur...). Ar salioù boutin (tekno, skiantoù, strolladoù, sonerezh) a rank bezañ renket goude an implij (kadurioù ha taolioù renket...).
- Difennet eo chaokañ chewing-gum. Difennet eo d'ar skolajidi debriñ e-barzh savadur ar Skolaj (nemet ar boued a vez kinniget dezho gant ar skipailh buhez skol da vare an ehanou).
- Da vare ar 5 munutenn troc'h etre div gentel e rank ar skolajidi chom en o sal-glas. M'o devez ezhomm mont d'ar privezioù e rankont goulenn an aotre : dreistordinal e rank bezañ. Arabat 'vefe muioc'h evit daou skolajiad dre glasad o vont asambles d'ar privezioù d'ar c'houlz-se. A-benn ma adson ar c'hloc'h e tle ar skolajidi bezañ prest evit ar gentel a grog.
- N'eo ket aotreet ar skolajidi da implijout an urzhiataerioù a zo er salioù-klas ma n'int ket aotreet d'en ober gant ur c'helenner pe ur c'hasour.
- Goulennet 'vez digant ar skolajidi teurel pled ouzh an endro (da skouer, oc'h izelaat an tommerezh a-raok digeriñ ar prenistri ma vez re domm er sal-glas, pe c'hoazh ober gant an div boubellenn (unan evit al lastez, unan all evit ar paper).
- Bemnoz o devez skipailhoù kempenn ar skolajidi da lazhañ ar gouloù, da serriñ ar prenestroù, da skarzhañ ar boubellenn baper, da skubañ al leur, da ziverkiñ an daolenn ha bemnoz da c'houlenn digant ar skolajidi all lakaat ar c'hadorioù war an taolioù ha renkañ ar salioù-klas (taolioù, estajerennoù) ha leuskel ul lec'h kempenn war o lerc'h.

Reolennoù ar skolajidi en diavaez eus ar c'hentelioù

- Digor e vez al levraoueg e-pad an ehanou ha da greisteiz. Ul lec'h sioul e rank bezañ. N'eo ket aotreet mont gant lec'hiennoù n'o deus ket ur pal pedagogiezh (Rouedadoù sokial, c'hoarioù...).
- Digor e vez an oaled gant un urzh-tremen resis dre live dindan karg ur c'hasour.
- Rankout a ra ar skolajidi doujañ d'an urzh tremen evit mont da zebriñ.
- Ne reder ket en trepasoù nag er skalieroù, ne hucher ket, ne vounter ket...
- N'eo ket aotreet ar skolajidi da straniñ en trepas pe er salioù klas e-pad an ehanou pe da vare kreisteiz. Ret eo diskenn war ar porzh.
- Ar skolajidi a rank gortoz kirri-boutin Douarnenez ha Kemperle hep kuitaat ar skolaj.
- Rankout a ra ar skolajidi bezañ gwisket en un doare dereat, n'eo ket aotreet dougen togoù, kasketennoù, bonedoù er savadurioù.
- Ne vez ket graet gant binviji niverel (pellgomz hezoug da skouer) er skolaj e-maez an eurioù resisaet (etre 8e00 ha 5eur).
- Kastizet groñs e vo ar skolajidi a gasfe er skolaj pe en hunva an holl broduioù diaotreet. Difennet eo ar benvegoù dañjerus (kontilli da skouer) hag ivez aerosolioù, difazieroù dourek.
- Kement tra torret espres-kaer dre ziouer a zoujañs ouzh an dafar a vo faturennet d'an hini e kaoz.
- Dleout a ra ar gerent kelaouiñ dre bostel pe dre Pronote ar vuhez skol ma vez ret d'o bugel kaout louzoù war an amzer skol (ordrenañs a gevret).
- Faturennet e vo priz an dornlevrioù nann rentet pe diroget e fin ar bloavezh-skol.

Darempredoù etre tud ar vugale hag ar gelennerien

- Danvez ar c'hentelioù, al labour-noz, ar barregezhioù priziet hag an notennoù a zo lakaet war Pronote.

- Kaset e vez ur rentañ-kont diwar-benn disoc'hoù-skol ar skolajiad d'e dud e-karg e dibenn pep trimiziad.
- En trimiziad kentañ e vez dalc'het un emvod pe emgavioù pedagogiezh evit pep klasad gant tud ar vugale hag ar gelennerien. Kemer perzh a c'hell ar skolajidi ober.
- En trimiziadoù all e vo emgavioù hiniennel diouzh an ezhommoù.

Kelaouiñ ha kuzuliañ

- Evit kelaouiñ gwelloc'h tud ar vugale hag evit ma vo aesoc'h dezho kemer perzh, e vez embannet war Pronote roll-labour emvodoù ar C'huzul-skolaj eizhtez en a-raok d'an nebeutañ.
- Ma vez kudennoù evit lakaat ar c'henemglev-mañ da dalvezout e c'hell ar C'huzul-skolaj bezañ goulennataet gant :
 - dek skolajiad d'an nebeutañ ;
 - pe unan eus izili ar skolaj ;
 - pe pemp familh a-douez tud ar vugale.
 Ur wech ar bloaz e vez bodet dileuridi ar skolajidi, dileuridi ar gerent ha dileuridi ar skipailh d'ar bodad boued.
- E pep klasad e vez dalc'het gant ar skolajidi, a-gevret gant o fenngelennerien, un emvod hag eskemmoù anvet "Emvod klasad", bep sizhun. Komzet 'vez eus buhez ar skolaj, an hentañ, pe diaesterioù a zeu e-barzh ar skolaj. Bep an amzer e c'hell bodañ meur a glasad, pe zoken pediñ un den eus an diavaez.
- Etre an emvodoù e vez kannad pe kannaded ar skolajidi, dileuriet ganto e penn kentañ ar bloaz, e darempred gant izili ar skipailh pedagogiezh, ar penngasourezed da gentañ tout.
- Ma ne zouj ket da wirioù ar re all e rank ar skolajiad dont da zisplegañ perak dirak ar bodad kuzuliañ (penngasourez, penngelenner(ez), kerent).
- Disklêriet e vez d'e dud dre lizher gant ar benngasourez ar pezh a zo rebechet dezhañ hag an alioù bet savet dezhañ.
- Ma ne ya ket gwelloc'h an traoù goude-se e vez goulennet gant ar skolajiad dont da zisklêriañ e emzalc'h dirak ar C'huzul-Reoliañ, gant an dud-mañ e-barzh :
 - rener pe kannad ar renerezh ;
 - Penngasour(ez) e karg live klas ar skolajiad(ez) pedet ;
 - penngelenner(ez) ar c'hlasad ;
 - unan eus dileuridi ar gerent ;
 - unan eus dileuridi ar c'hlasad.
 - pedet e vez kerent ar skolajiad(ez) e lodenn 1añ ar bodad.
- Kinniget eo ar c'henemglev-mañ d'an holl dud a zo e-soñj enskrivañ o bugel er skolaj. Kinniget e vez ivez e penn-kentañ ar bloaz-skol d'ar skolajidi nevez erru evit o c'helaouiñ, ober un diviz ganto ha marteze gwellaat anezhañ.

Skeuliad ar c'hastizoù

Setu skeuliad ar c'hastizoù :

- Dalc'h 1 eurvezh, 2 eurvezh hanter.
- Diarbenn atebekaot.
- Skarzhañ diabarzh (skarzhañ eus ar c'hentelioù).
- Skarzhañ berrbad.
- Skarzhañ da vat.

REOLENNAOUEG AN HUNVA

I. Eurioù / Mont en-dro hollek

Mare an hunva a grog adalek fin ar c’hentelioù (5e00) betek 8e15 an devezh war-lerc’h, adalek m’emañ an diabarzhidi erruet er skolaj.

Goulennet e vez digant ar familhoù kelaouiñ en a-raok pa ‘vo ezvezant o bugel, dre bostel (penngasouriezh.skolaj.jakez.riou@diwan.bzh) pe dre Pronote.

M’ho peus ezhomm eskemm pe titouriñ skipailh an hunva war an dra vallus ez eus un niverenn hezoug da implijout etre 7e noz betek 8e30 mintin : 07.66.74.49.49

Setu lusk an diabarzhidi :

Fin an devezh er skolaj	An nozvezh en hunva	Ar mintinvezh en hunva
5e05 – 5e40 : Kleuboù 5e50 – 6e40 : Studi Noz 6e40 – 7e25 : Koan 7e25 – 7e30 : Galv 7e30 – 8e00 : Karr-boutin	8e10 – 8e45 : Buheziñ : Oaled, beilhadeg, mare dibres er c’hambreier 8e45 – 9e00 : Sal-dour 9e00 - 9e30 : Mare chuchumuchu 9e30 : Lazhet 'vez ar gouloù	6e50 : Dihuniñ 7e-7e30 : Dijuni 7e30-7e40 : Sal-dour 7e40-7e45 : Renkañ ar c’hambreier 7e45 : Galv 7e50 : Karr-boutin

II. Surentez

Dav eo da bep hini en hunva doujañ da surentez an holl, lakaat ur skolajiad pe ar strollad en arvar a vo kastizet, gallout a rafe mont betek betek bezañ skarzhet eus an hunva. Difennet eo groñs kas d’an hunva benvegoù dañjerus pe produioù hag a lakfe an dud en arvar (da skouer aerosolioù.)

Dizaliet e vez kas traoù a dalvoudegezh pe arc’hant. Ne c’hell ket skipailh an hunva bezañ atebek eus ul laeroñsi pe ur c’holl.

Difennet eo d’ar skolajidi mont e kambreier ar re all war-lerc’h 9 noz. Difennet eo kuitaat an hunva hep aotre.

III. Yec’hed

a. Louzoù :

Rankout a ra d’ar gerent kelaouiñ ar skipailh hunva louzaouiñ o bugel. Goulennet ‘vez diganto kelaouiñ ar skipailh dre bostel (Pronote pe penngasouriezh.skolaj.jakez.riou@diwan.bzh) ha kas dezhi skouerenn an ordonañs. Dalc’het ‘vez al louzoù en ur voest prenet e burev Buhez- Skol. Difennet eo kemer louzoù hep kelaouiñ.

Aliet ‘vez digant ar familhoù bezañ war evezh n’eo ket klañv o bugel a-raok kas anezhañ d’ar skolaj. Ma ‘z emañ ur skolajiad klañv ha ne c’hell ket chom an hunva e vo galvet ar familh evit dont da gerc’hat anezhañ.

Boeson pe produioù diaotreet a zo difennet groñs en hunva, un diabarziad mezh vo skarzhet diouzhtu, dav ‘vo d’ar familh dont kerkent da gerc’hat anezhañ.

b. Implij ar skrammoù :

Difennet eo ar skrammoù en hunva (smartphone, Switch, tablezennoù...). Ma 'vez rasket unan gant ar skipailh kasourien, lakaet e vo e burev penngasourezed.

Aotre eo ar skolajiad da implijout o fellgomz hezoug adalek fin ar studi noz (6e40) betek erruout en hunva (8e). Ur wech eno e rank ar skolajidi reiñ o hezoug d'ar gasourien. Adtapout a raint anezho an devezh war-lerc'h pa loc'ho eus an hunva.

Ma en deus ezhomm gervel e dud eo c'hell ar skolajiad goulenn digant ur c'hasour implijout hezoug an hunva pe e hini dindan evezh ur c'hasour.

c. *Boued :*

Difennet eo groñs d'an diabarzhidi kas boued, pe evajoù d'an hunva.

d. *Emzalc'h :*

An hunva a zo ul lec'h a surentez hag a rank degemer an holl en aergelc'h madelezhus. Dav eo da pep hini doujañs da lusk pe ezhommoù ar re-all. Dichekerezh, goapaerezh, emzalc'hioù trouzus dizehan a vo kastizet. Ret eo d'ar skolajidi doujañ da intimelezh, diskuizh ha kousk ar re all.

Difennet eo diskouez a-wel e reizh pe an darempredoù reizh en hunva, un emzalc'h e mod-se a vo kastizet, gallout a rafe mont betek skarzhet eus an hunva.

Dav eo da bep skolajiad kaout ur pijama.

e- *Kempenn.*

Dleout 'ra ar skolajidi doujañ d'ar savadur. Goulennet 'vo kemer perzh evit difrejañ koust kempenn ar pezh vefe distrujet.

Ret eo d'ar skolajidi renkiñ o aferioù ha tremen an taol skubellenn er gambr a-raok loc'hañ diouzh ar mintin.

IV. Gwirioù an diabarzhidi :

Gwir o deus an diabarzhidi kinklañ o c'hambur.

Gwir o deus an diabarzhidi kaout un benveg evit selaou sonerezh en hunva, ma n'eus ket a skramm (MP3, MP4...)

Gwir o deus ar skolajidi pellgomz d'o zud ur wech erruet en hunva, dav eo goulenn d'ur c'hasour adtapout an hezoug. Diouzhtu pa 'vo echu ar pellgomzadenn e vo roet an hezoug d'ar c'hasour.

Convention de vie au collège

- L'équilibre de la vie à l'intérieur de l'établissement est fondé sur la confiance réciproque dans la responsabilité de chacun et sur le respect de l'autre. Le règlement s'applique à tous.
- Les élèves, les membres de l'équipe pédagogique et les parents s'engagent à promouvoir cet esprit dans leurs relations respectives.
- Dans cette perspective, certaines règles pratiques doivent cependant être indiquées ci-après pour garantir la sécurité de tous et assurer la clarté de l'information de chacun.

Les horaires du collège

- Lundi, mardi, jeudi et vendredi (8h25-17h). La responsabilité du collège ne peut être engagée en dehors de ces horaires.
- Le collège est ouvert à partir de 8h.
- L'assistance aux cours étant obligatoire, toute dispense de sport supérieure à une semaine doit être motivée par un certificat médical remis au bureau de la vie scolaire. Pour une dispense de moins de 8 jours, les parents doivent écrire un courrier qu'ils adresseront à la vie scolaire ainsi qu'à l'enseignant(e) d'EPS.
- Lorsqu'un cours ne peut avoir lieu, les élèves se rendent dans leur salle de classe, sauf activité de remplacement organisée.
- Pour des raisons de sécurité et pour l'information de chacun, les élèves ne doivent pas sortir de l'établissement entre deux heures de cours, sauf pour une activité encadrée par l'équipe.
- Cependant, en cas d'absence d'un enseignant en fin de journée et s'il n'est pas remplacé, les élèves (selon leur niveau de classe et selon leur régime) ayant l'accord de leurs parents, peuvent quitter l'établissement (Cahier de correspondance à présenter à un(e) surveillant(e)).
- Toute absence doit être signalée au bureau de la vie scolaire avant 9h par téléphone (02 98 95 71 57) ou par e-mail (penngasouriezh.skolaj.jakez.riou@diwan.bzh). Elle doit ensuite être justifiée par un écrit signé et daté des parents et transmis au bureau de la vie scolaire.
- Une absence de plusieurs jours pour maladie est à justifier par un certificat médical ou une explication des parents adressée au bureau de la vie scolaire.
- Si un élève est malade pendant un cours, il est accompagné par l'un des délégués jusqu'à l'infirmerie. Les parents seront appelés si le collégien ne va pas mieux après s'être reposé quelques instants.
- Les demandes d'autorisation d'absence prévue doivent être formulées par les parents au moins trois jours à l'avance.
- Après une absence, l'élève doit avertir les animatrices principales de son retour et récupérer son retard scolaire.
- Si un élève arrive en retard il doit présenter à son professeur son carnet de correspondance signé de l'un des surveillants pour justifier du retard.

Projet Diwan

- Parler français au collège va à l'encontre du projet d'immersion linguistique de Diwan, il est demandé aux élèves de converser en breton, partout et en premier lieu dans les salles de classes.

Organisation des cours

- En début de matinée et d'après-midi, et après chaque récréation, les élèves doivent attendre en rang leur professeur sous le préau. Ils se rendent ensuite calmement dans leur salle de classe.
- En cas de manques répétés de travail ou de matériel, l'élève sera retenu une heure pour faire son travail.
- Un travail non rendu dans les temps impartis ainsi qu'une tentative de fraude pendant une évaluation seront

sanctionnés.

- Les élèves doivent respecter les adultes : toujours rester polis.
- Pour prendre la parole, les élèves doivent lever le doigt, pour se lever en classe également.
- Les élèves ne peuvent changer de place en classe sans autorisation.
- On n'écrit, ni ne dessine sur les tables. Nettoyer les tables si nécessaire.
- Le matériel principal doit se trouver dans les casiers prévus sous les tables. Les fournitures plus importantes sont à placer dans les grands casiers. Aucun livre ou classeur ne doit être posé à terre. Les différents casiers doivent être rangés.
- Nous demandons aux élèves de ne pas salir les salles de classe (papiers au sol...). Les autres salles (techno, sciences, groupes, musique) doivent être rangées après utilisation (chaises et tables rangées...).
- Il est interdit de mâcher du chewing-gum. Les élèves ne sont pas autorisés à manger dans l'enceinte du collège (sauf les en-cas proposés lors des pauses par la vie scolaire).
- Pendant les 5 minutes entre deux cours, les élèves doivent rester dans leurs salles de classes. S'ils ont besoin d'aller aux toilettes, ils doivent demander l'autorisation : cela doit être exceptionnel. Il ne peut y avoir plus de 2 élèves par classe à aller aux toilettes en même temps pendant les intercours. Les élèves doivent être prêts lorsque le cours suivant commence.
- Les élèves ne doivent pas utiliser les ordinateurs qui se trouvent en salles de classes sauf avec l'autorisation d'un professeur ou d'un surveillant.
- Les élèves s'investissent dans le développement durable (en baissant par exemple le chauffage avant d'ouvrir les fenêtres, ou encore en utilisant les deux poubelles (l'une pour les déchets, l'autre pour le papier)).
- Chaque soir, les élèves en charge du ménage doivent éteindre les lumières, fermer les fenêtres, sortir la poubelle papier de la salle, balayer le sol, effacer le tableau et demander aux élèves de poser les chaises sur les tables, de ranger les salles (tables, étagères) et de laisser la classe propre.

Règlement des élèves en dehors des cours

- La bibliothèque est ouverte pendant les récréations et sur l'heure du déjeuner. Elle doit rester un endroit calme. Il est interdit d'aller sur les sites qui n'ont aucun but pédagogique (Réseaux sociaux, jeux...).
- Le foyer est ouvert selon un ordre de passage par niveau et encadré par un surveillant.
- Les élèves doivent respecter l'ordre de passage au self.
- On ne court pas dans les couloirs ni dans les escaliers, on ne crie pas, on ne pousse pas...
- Les élèves ne sont pas autorisés à rester dans les couloirs pendant les récréations et sur l'heure du déjeuner. Ils doivent descendre sur la cour.
- Les élèves doivent attendre les cars de Douarnenez et de Quimperlé sans quitter le collège.
- Les élèves doivent être habillés correctement, ils ne doivent porter ni casquette, ni chapeau, ni bonnet à l'intérieur.
- Ils ne doivent pas utiliser de matériel numérique (téléphone portable par exemple) au collège en dehors des horaires définis (entre 8h et 17h).
- Les élèves qui apporteraient au collège ou à l'internat des produits non autorisés seraient sérieusement sanctionnés. Il est défendu d'utiliser des outils dangereux (couteaux par exemple) ainsi que les sprays, correcteurs liquides...
- Le matériel détérioré par manque de respect sera facturé à l'élève responsable.
- Les parents doivent avertir la vie scolaire par e-mail ou par Pronote en cas de prise de médicament par leur enfant sur le temps scolaire (ordonnance à joindre).
- Les manuels scolaires non rendus ou déchirés seront facturés à la fin de l'année scolaire.

Relations entre parents et professeurs

- Le travail donné en classe, les devoirs, les compétences évaluées et éventuellement les notes sont indiquées sur Pronote.
- Un bulletin sur les résultats scolaires de chaque élève est adressé aux parents d'élèves en fin de trimestre.
- Au premier trimestre, des rendez-vous individuels parents/professeurs sont proposés. Les élèves peuvent y participer.

- Aux trimestres suivants, des rendez-vous pourront être proposés suivant les besoins.

Informier et conseiller

- Pour mieux informer les parents et pour qu'ils puissent plus facilement y participer, l'ordre du jour des conseils d'établissement est enregistré sur Pronote huit jours minimum avant chaque réunion.
- Si surgissent des difficultés à mettre en application cet accord, le conseil d'établissement peut être réuni à la demande de :
 - 10 élèves minimum ;
 - l'un des membres de l'équipe du collège ;
 - 5 familles du collège.La commission de restauration est réuni une fois par an en la présence des délégués élèves, parents et équipe pédagogique.
- Dans chaque classe et chaque semaine, a lieu une séance de « vie de classe » avec le professeur principal. La vie du collège y est évoquée, l'orientation ou les difficultés qui peuvent survenir au collège. De temps en temps plusieurs classes peuvent être rassemblées et des intervenants extérieurs peuvent être invités.
- Entre les séances de vie de classe, les délégués des élèves élus en début d'année, sont en relation avec l'équipe pédagogique, les animatrices principales en particulier.
- S'il ne respecte pas les droits de chacun, l'élève doit venir s'expliquer devant la commission éducative (Animateur principal, professeur principal, parents).
- Les parents reçoivent alors un courrier leur expliquant les faits reprochés ainsi que les conseils donnés pour y remédier.
- Si le comportement de l'élève ne s'améliore pas ensuite, il lui est demandé de passer en conseil de discipline, en présence des :
 - directeur ou membre de la direction ;
 - animateur principal en charge du niveau de classe de l'élève ;
 - professeur principal de la classe ;
 - un(e) délégué(e) parent ;
 - un(e) délégué(e) de la classe.les parents du collégien seront convoqués lors de la 1ère partie de la commission.

Cette convention est présentée à tous les parents souhaitant inscrire l'un de leurs enfants au collège. Elle est également présentée aux nouveaux élèves de l'établissement en début d'année scolaire pour les en informer et peut être l'améliorer.

Echelle des sanctions

Voici l'échelle des sanctions :

- Retenue d'1 heure, 2 heures 30.
- Mesure de responsabilisation.
- Exclusion inclusion (exclusion des cours).
- Exclusion temporaire.
- Exclusion définitive.

REGLEMENT DE L'INTERNAT

I. Horaires / Fonctionnement général

La période de l'internat commence à partir de la fin des cours (17h) et se termine à 8h15 le lendemain, une fois les internes arrivés au collège.

Il est demandé aux familles de prévenir en avance l'équipe de Vie Scolaire lorsque votre enfant est absent, par mail (penngasouriezh.skolaj.jakez.riou@diwan.bzh) ou par Pronote.

Si vous avez besoin d'échanger ou d'informer l'équipe d'internat d'un élément urgent vous pouvez joindre ce numéro entre 19h et 8h30 : 07.66.74.49.49

Voici le rythme des internes :

Fin de journée au collège	La nuit à l'internat	Le matin à l'internat
17h05 – 17h40 : Clubs 17h40 – 17h50 : Récréation 17h50 – 18h40 : Etude du soir 18h40 – 19h25 : Dîner 19h25 – 19h30 : Appel 19h30 – 20h : Car	20h10 – 20h45 : Animation : Foyer, veillée, temps libre dans les chambres 20h45 – 21h00 : Salle de bain 21h - 21h30 : Temps calme 21h30 : Extinction des feux	6h50 : Réveil 7h-7h0 : Petit-déjeuner 7h30-7h40 : Salle de bain 7h40-7h45 : Rangement des chambres 7h45 : Appel 7h50 : Car

II. Sécurité

Il est du devoir de chacun de veiller à la sécurité des autres à l'internat, mettre un collégien ou un groupe en danger sera sanctionner, la sanction pouvant aller jusqu'à une exclusion définitive de l'internat.

Il est interdit d'amener à l'internat des objets ou produits dangereux, ou qui mettrait les personnes en danger tel que les aérosols.

Il est déconseillé d'apporter de l'argent ou des objets précieux. L'équipe d'internat ne pourra être tenue responsable en cas de vol ou de perte.

Les élèves ne sont pas autorisés à aller dans les autres chambres après 21h.

Il est interdit de quitter l'enceinte de l'internat sans autorisation.

III. Santé

a. Les médicaments :

Les parents doivent prévenir l'équipe d'internat des traitements médicaux de leurs enfants. Il leur est demandé de prévenir l'équipe par écrit (Pronote pe penngasouriezh.skolaj.jakez.riou@diwan.bzh) et d'envoyer un exemplaire de l'ordonnance.

Les médicaments sont conservés dans une boîte verrouillée dans le bureau de Vie Scolaire. L'automédication est interdite.

Il est demandé aux familles d'exercer une vigilance quant aux maladies de leurs enfants et de ne pas

envoyer au collègue leur enfant si celui-ci est malade. Si l'état de santé de l'élève est jugé incompatible avec la vie à l'internat, il sera demandé aux familles de venir chercher leur enfant. La détention et la consommation de boissons alcoolisées sont interdites, un interne sous l'influence d'un produit toxique sera immédiatement exclu de l'internat et la famille devra immédiatement venir le récupérer.

b. Les écrans :

Les écrans sont interdits à l'internat (smartphone, Switch, tablettes...). Si un appareil est confisqué par un animateur, il sera remis dans le bureau des animatrices principales.

Les élèves peuvent utiliser leurs téléphones à partir de la fin de l'étude du soir (18h40) jusqu'à l'arrivée à l'internat (20h). Une fois là-bas, le collégien doit donner son téléphone à l'animateur. Il le récupérera le lendemain matin en quittant l'internat.

Si l'élève a besoin de joindre un parent il doit demander son téléphone, ou celui de l'internat, sous la vigilance d'un animateur.

c. Nourriture :

Il est interdit aux internes d'amener de la nourriture ou des boissons à l'internat.

d. Comportement :

L'internat est un lieu sûr et chacun doit accueillir l'autre avec bienveillance. Chacun doit respecter le rythme ou les besoins des autres. L'insolence, les moqueries, les comportements bruyants à répétition seront punis. Les élèves doivent respecter l'intimité, le repos et le sommeil des autres.

L'exhibition ou autres actes sexuels sont interdits à l'internat, un tel comportement sera sanctionné, la sanction pouvant aller jusqu'à une exclusion définitive de l'internat.

Chaque interne doit avoir un pyjama.

e- Entretien

Les élèves doivent respecter le bâtiment. En cas de dégradation, une participation financière sera demandée.

Les élèves doivent ranger leurs affaires et balayer leur chambre avant de quitter l'internat le matin.

IV. Droit des internes

Les internes ont le droit de décorer leur chambre, tout en sachant qu'ils devront avant chaque période de vacances tout enlever.

Les internes peuvent avoir un appareil pour écouter de la musique, tant qu'il n'y pas d'écrans (MP3, MP4...)

Les internes ont le droit d'appeler un responsable légal une fois arriver à l'internat, il doit demander à l'animateur pour récupérer son téléphone. Dès la fin de l'appel, le téléphone sera rendu à l'animateur.